

*Tud ar vro - Bro Leon*  
Roll kanaouennoù - Dañs round

**Pardon Sant-Egareg**

O pardonañ me a zo bet,  
E chapel Sant-Egareg.

Hag an distro diouzh an noz,  
Ne welan nemet tourioù.

Tourioù du ha tourioù gwenn,  
Ha kleier divazhoulet.

Hag a sone ken skedus,  
Evel ma ra ur muzik.

Evel ma ra an durzhunell,  
O kanañ war he bodenn.

Ha dre he c'han e lavare,  
Va mestrez a zo klanvet.

Va mestrez-me a zo klanvet,  
Ha me 'zo vont d'he gwelet.

Ar wech kentañ p'oan aet en ti,  
Edo war ar bank o c'hoari.

An eilvet gwech p'oan aet en ti,  
Ar beleg ouzh he nouie.

An trede gwech p'oan aet en ti,  
'Do war ar bank lienet.

Ha me a ziroll da ouelañ,  
Na petra rin-me bremañ ?

Va mestrez koant a zo marvet,  
Warc'hoazh e vo interet.

Gant tri eus va c'hamaraded,  
Ez in d'he c'has d'ar vered.